



Karaez – 02 / 06 / 2012

VOTADEG KEODEDEL !

« Daoust ha mat eo deoc’h e vefe divyezhek brezhoneg-galleg ti-post Karaez ? »

Hiziv e kinnig Ai’ta, ur strollad savet evit difenn ha kas war-raok ar brezhoneg, ur **votadeg keodedel** dirak ti-post Karaez. Diwar-benn plas ar brezhoneg e-barzh hon ti-post an hini eo : war ar pannelloù en diabarzh hag en diavaez, er mekanikoù koulz hag ar gwir da gomz brezhoneg gant an implijidi kontant d’en ober.

Ur yezh vev a zo ur yezh hag a c’haller gwelet, klevet hag implijout bemdez er vuhez foran. **N’eo ket reizh e chomfe ar brezhoneg e-maez an tier-post** hag ar servijoù publik all. Hiziv e striv muioc’h-mui ar strollegezhioù lec’hel evit reiñ e blas d’ar brezhoneg. Sinet he deus kêr Garaez ar garta “**Ya d’ar brezhoneg**“ ha graet e vez muioc’h-mui gant hor yezh amañ (en ti-kêr, war ar banellerezh, er skolioù...). D’Ar Post ivez da heuliañ ar gevredigezh a-vremañ ha da zoujañ ouzh ar pezh a c’houlenñ ingal ar Vretoned !

Amañ, e Karaez, e krogo a-benn nebeut labourioù bras evit adkempenn burevioù Ar Post. **Abalamour da betra ne vefe ket roet e blas d’ar brezhoneg da geñver an dra-se ?** Ur binvidigezh eo hor yezh evit tout an dud : evit ar vugale a zesk brezhoneg er skolioù, evit an holl Vretoned a zo lorc’h enne gant o identelezh... hag evit Ar Post ivez, kar diskouez a rafe evel-se e oar bezañ tost ouzh e bratikoù hag o sevenadur !

**VOTOMP HA DISKOUEZOMP HOLL
E FAOTA DIMP KAOUT BREZHONEG
EN TI-POST NEVEZ !**



Carhaix – 02 / 06 / 2012

VOTATION CITOYENNE !

« Etes-vous favorable au bilinguisme breton-français à la Poste de Carhaix ? »

Le collectif Ai'ta, pour la défense et la promotion de la langue bretonne, propose aujourd'hui une **votation citoyenne** devant la Poste de Carhaix. Celle-ci a pour objet l'introduction de la langue bretonne dans notre Poste : tant au niveau de la signalétique extérieure et intérieure, qu'au niveau des automates, ainsi que la possibilité de s'exprimer en breton aux guichets avec les employés brittophones volontaires.

Une langue vivante est une langue que l'on peut voir, entendre et utiliser dans la vie de tous les jours. **Il est anormal que le breton soit exclu des bureaux de Poste**, ainsi que de nombreux services publics. Aujourd'hui, les collectivités locales entreprennent de plus en plus d'efforts afin que notre langue ait sa place dans la vie de tous les jours. La ville de Carhaix a ainsi signé la charte « **Ya d'ar brezhoneg** » et notre langue est de plus en plus utilisée dans la vie quotidienne (à la mairie, sur les panneaux de signalisation, dans les écoles...). La Poste doit elle aussi s'adapter à la société actuelle et aux demandes répétées des Bretons !

D'importants travaux seront lancés d'ici peu à Carhaix afin de moderniser le bureau de Poste. **Pourquoi ne pas en profiter pour donner toute sa place à la langue bretonne ?** Le breton est une richesse pour tout le monde : pour les enfants qui l'apprennent à l'école, pour tous les Bretons fiers de leur identité... et pour La Poste aussi, qui montrerait par là qu'elle sait rester proche de ses usagers !

**VOTONS POUR MONTRER NOTRE VOLONTE
DE VOIR LA LANGUE BRETONNE
PRISE EN COMPTE A LA POSTE !**

Contact : <http://ai.ta.free.fr/> ou ai.ta.breizh@gmail.com